



# LITANIOU

## AR VERG'HEB.

**A**UTROU DOUE oll-galloudus,  
 Hac ep musur trugarezus,  
 C'hui a vel peguen infirm omp,  
 Ho pèt compassion ouzomp.  
 Jesus-Christ, Redemptor ar bed,  
 Distroit ouzomp, ni ho ped,  
 Sellaouit ous hor pedennou,  
 Hac exaucit hor pedennou.

Ni ho ped, c'hui Tad eternal,  
 C'hui Map ha c'hui Speret-Santel,  
 Tri ferson en eun Doue epq'en,  
 Galvet an Drindet souveren,  
 Da sellet ouzomp a druez,  
 Pa regretomp hor goal vuez:  
 Enoc'h epq'en ec'h esperomp,  
 Rac-se ho pèt truez ouzomp.

Santes Mari , Mam da Zoue ,  
 C'hui eo a bedomp-ni goude ;  
 Guerc'hes santel ar Guerc'hezet ,  
 Pa zomp deoc'h en em adresset ,  
 Pa zoc'h da Jesus ar Vam din ,  
 Hac ar Vam eus ar c'hraç divin :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

Mam bur ha neat a bep pec'het ,  
 Mam chast ha flam diflam chomet ,  
 Eur Vam din da veza caret ,  
 Ha da veza cals admiret ;  
 C'hui a zo guir Vam d'hor C'hrouer ,  
 C'hui a zo guir Vam d'hor Salver :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

Guerc'hes prudent ha venerabl ,  
 Guerc'hes a zo meurbet meulabl ,  
 Guerc'hes a zo q'er galloudus ,  
 Q'en douç ha q'en trugarezus ,  
 Guerc'hes a zo fidel bepret ,  
 Mellezour a justic parfet :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

C'hui eo demeuranç ar furnez ,  
 C'hui zo q'iriec d'hon levenez ,  
 Hac eur vessel spirituel  
 Din a eun enor eternal ,

Eur vessel a zevotion ,  
 Din a gousideration :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

C'hui a zo eun tensor precius ,  
 Hac eur rosen mysterius ,  
 Tour David , tour a olifant ,  
 Palæs aour-fin hac excellent ,  
 Arc'h a allianç beniguet ,  
 Dor an Env zo digor bepret :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

Verelaouën zo sclear meurbet ,  
 Dar re infirm guir remed ,  
 C'hui eo ar gonsolaçion  
 Dar re a zo en afflicçion ,  
 C'hui eo refuch ar bec'herien ,  
 C'hui eo sicour ar Gristenien :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

Rouanez oc'h dan oll Ælez ,  
 Ha dar Batriarchet ivez ;  
 Dar Brophedet , dan Ebestel ,  
 Ha dan oll Verzerien santel ,  
 Dar Goufessoret , Guerc'heset ,  
 Ha dan oll Sænt ha Santeset :  
 Pedit evidomp deiz ha nos ,  
 Evit ma zaïmp dar barados.

Oan Doue crucifiet ,  
 A effaç pec'hejou ar bed ,  
 Dre ho madelez infinit ,  
 Autrou Jesus , hor pardonit.  
 Oan Doue crucifiet ,  
 A effaç pec'hejou ar bed ,  
 Dre ho madelez infinit ,  
 Autrou Jesus , hon exaucit.

Oan Doue crucifiet ,  
 A effaç pec'hejou ar bed ,  
 Enoc'h , Autrou , ec'h esperomp ,  
 Rac'h-se ho pêt truez ouzomp.  
 Grit ma zaïmp gueneoc'h da repos  
 Er c'hloar eveus ho parados.

O Jesus-Christ , hor selaouit !  
 O Jesus-Christ , hon exaucit !

